

35

KLEMMOU

EUR PLAC'H MANKET

VAR EUN TON TRIST

Selaout breman va mouez, va c'hamaradezet,
C'houi pere em yaouankis, a meus bet kals karet,
Eus a Doullie a Ludu, me ra deac'h ma c'hlemmou,
Deut holl assemblez gan-in, da veska ho daelou.

Me a meuz kolel breman va reputation,
Va c'halon a zo karget ha zezolation,
Dre ma meus kredet, siouas, ya faoz kamaradou,
E meus kolel ar c'haera demeus va bokejou.

Beteg breman me c'halle laret a vones hael,
E oan kourra famelen a oa e Breiz-Izel,
A breman me zo udur e tones an holl verec'het,
Pa eo va c'haera bouket siouas gan-in kolel.

Henez oa kaera tenzor e moa bars er bed-man,
Ne kavin ket henep leac'h, da brena seur dezan,
Dre veza deut da gredi camaradet treitour,
E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa deuan d'amina ar voul rond deus ar bed,
Siouas me vel varnezhi breman kals a verec'het
Pere zo kollet gante kouls a me ho rozen,
O veza deut da flout en comzou treitourien.

Va hol gerent zo siouas gan-in dizonoret,
Va chaus a zo dinatur, va flaneden kollet,
Va c'halon zo en irvoud, kouls en nos vel en de,
Me a c'houlou ar maro vit disken bars em be.

Goude va fragilite, me zo holl ankeniet,
E compren bar er stad-trist, e pehini on rented,
Beteg breman me meus bet douget kokardeno,
Breman e meus eur bisac'h, eur vas da vont en dro.

Beteg an oad ugent vloas, me a meus bet bevet
Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
Neuze me a oa karet gant an holl em chanton,
Neuze, kamaradezet, oa laouen va c'halon.

Goude me meus bet henliet, kouls en noz vel en de,
Ar gwel kompagnunez, a zo bars em c'hontre,
Dre se me zo mepriset, ebars en Breiz-Izel.
Va evrustet er bed-man, zo eet gant an avel.

Ne meus ket heuliet siouas, avis tad na mam,
Dre-se ne meus ket gallet beva ive divlam,
Greet a meus skouarn vouzard pa gleven anezhe,
Koulskoude deus bet laret ar wirionnez din-me.

Lavaret zo bet din-me gant he sur aliez,
E heul gwel kompagnunez, mije tristedigez,
Mes dre ma oan c'hoas yaouank, veprisen ho c'homzou
A ze ra din-me breman skuil eur mor a zaelou.

Ma mije bet o c'hredet, heuliet ho gourc'hemen,
Va buez, kamaradezet, e vije bet laouen,
Mes pa ne meus ket sentet breman demeus ar stur,
Allas vit deus ar garek, e rankin ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet.
Awichou me eun tam da zebri a gweach all ne me ket,
Goude ma ve erc'h a scorn, ha lenn bras an avel,
Keuneud ne mo ket d'ober tan d'a doma va buguel,

C'houi, va c'hamaradezet, goude va oll anken,
Deño c'hoas d'am goapaad, gant eur galon laouen,
Mes mar kemerit an hent, en pehini zo danger,
C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouner.

Allas ! kamaradezet, daon hent zo er bed-man,
Anhini gemeran hent mad deus da zougen bec'h skan,
N'hep gemer an himi fall, bale war va roujou,
Deus eun pouner da zougen ha kals a dourmancho.

Vit war va chouek breman, a zo eur bec'h pouner,
Hag a meus deus e zouguen, kals a boan a miser.
Dalc'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou,
Adieu ta d'am yaouankis, ha d'am plijaduriou.

Louis LE BRUN.

(Propriété de l'Auteur).